

CHANSON AR GUIMPOU

Var ton : *Ar pevar Elemant.*

Didostañ oll tud va bro, me ho ped humblamant,
Da zilaou cana eur zon gret gant eun ignorant,
Non pas vit plijout d'an oll na ve bet hep e far,
Ma na vo ket guis eur zon, hi vo vel d'eun histoar,

Groët silañ d'am freposiou, m'ar galan en ober,
Rac dre ma guinidiguez ne larin ket guevier.
Dre ma z'oun eun den farçus, ha n'oun ket studiet,
M'ar teufen da n'em vankout, martreze vin excuset.

Pa fell d'in n'em occupi da reiñ divertissamant,
Non pas vit ma facho den na beza drouc contant
Evit clevet eur reson gret e guis d'eur badin,
Eur vintinvez araoc lein, var lerc'h ar c'houk mitin.

Tont da gonsideri penos e ma chanchet
An deguis hac ar c'honvers, trezomp va mignonet,
O velet an dud dibrez, pe an dud feneant,
Raont met trec'hal ha pourmen, ha pocho c'hoas arc'hant

Hag ar paour quès miserabl, ar labourer douar,
Eve bemde clasq an tu da scarza e gontouar,
Guiriou da bea bep bloas, hag alies cresquañç,
Dre ma ve ket ar poejou egal bars ar balanç.

An traou deus ar plaçou-ze marc'had mad da verza,
Pez a fot'vit e zervich zo goal guer da brena,
Goasquet eo a bep-tu an tiez a labour,
Ar vecherourien zo oet quer, me z'an d'en zicour.

Tout an artisanet a guement d'eus eur vicher,
An d'eus muioc'h a be evit eur labourer,
Caër en d'eus lakat poan da antreten e stal,
Ben pa peu ar bla en dro, na ne quet da vragal.

Dreist pep-tra eur merour a ranq pea fermou.
Rei lonet izel bris, a forcet d'ho guerza,
Donezoni an eil rum a oa mad da ouanva,
Ma vije ar c'honvers mad, ne voa quet ret o guerza,

Notro ne ra man ebet, a lip ato ar soç
Aen pa deu gouel Mikel na c'houlo quet gortos,
Rac ma na ve quet peet d'indan eur mis goude.
M'an prest d'ober mijo hep cavet tam true.

Lec'h ober ar c'hontrol e refe courach ha ners,
Deportet, va merour, quen vo mad ar c'honvers,
Pa zeo guir lak e boan dre mill ha mil moyen,
Cass saout bepret d'ar foar, vechou cafet quet perrien.

Petra era neuze nemet pea custum,
Goude c'hoas col e amzer, rosta e dam butun,
Hep caouet tam na banac'h, harp e gueign d'an hôtel.
Hep caouet met espérance da scarza e c'hodel.

Dreist pep-tra, mar deo ret dezan pea servichouren,
Ne deo nemet en zicour evit sevel e gueign,
Comananchou dreist muzul e ve ret da rei de.
Ha c'hoas, ma c'hant en avanç, n'en de ket hanter dioute

Gant bugaligou en ty a ya ive memes tra,
Quemeni bars on dispign hac a fot de guisqa,
Potret ha merc'het pelec'h ema o derrompag,
Me lar bars en davarn et caont an nevaj,

Heno peus descadurez gout aret tud savand,
Discon a rer nem billat ha penos caout chican,
Ha c'hoas mœur d'a scoulac'h hac aro exemplou,
Evit mont eon en hent a zoug d'an dizurzou.

Memes tra na servich quet di han couls hac ar re hal.
Nep na quet vo reputet pe laqueit un den fal,
Bremant ne rer convers na marc'had bet a gren,
Hep caout da lipet un tas pe ur veren.

An draze ne quet dizurs da nep var en usaj,
Me lar ema agreapl etre ar vignonaj,
Ne zifenner quet mont na dont bars en hostaliri,
Met deuz an hini a ev re da c'hoal restitui.

Na zifenner quet an evage gant mat hac honestis,
Mes deus a re touellet betec ar gourmandis,
Rac en evage so gret evit soulagi ar galon,
Da nep a oar nem regli gant moderation.

Mes ar c'hontrol pa ze greit aliez
Lot a ra dispignou fol evar o dienez,
Dienez de ohunan ha dar re al, vechou,
Ve ret de ober cof moan goude ar c'horvadou.

Mes c'houi ive hostijen evesait deuz o cont,
Goud aret couls ha me, dar bed al vo ret mont,
Pa vo tud re veo na ty discoet de hent ar guer,
Antronoz ha vo contant, c'houi po greit o tever.

Hent dal e moc'h obliget da nim zicour ive,
Rei a ret e donezon meur a vanac'h café,
Evit tena a profit an draze gavan mat,
Lot a reffe o squiant vit caout ur lipat.

Respect an douarn nacavé var ur marc'had lez,
Vechou gant ur banac'h lagout ve tol peo real armes'
Gant se merc'het har bouticou, couls hac an hostigen.
Ema brao de brema delc'hen ru o c'hlipen.

Tre an hostaliri, butun ha guiscamant,
A ya breman creon arc'hant en dud yaouanq.
Ar butun, vel ma gouzer, so ur louzaouen,
Lot a zioerfe ur pret vit caout ur vogueden.

Ar butun so un deboc'h betec ur pot denvet,
Ve goelet ganta ne vec ur c'horn tenna moguet,
Hac ar merc'het yaouanq en oad da bemzec vla,
A guemer deus ar butun a gout in implya.

Boestou tabatieren portrejou a bep mad
Hasten en eil de ben demeus ar butun flod,
Guel aran modelou neo oar greeq ha yan ato,
Bremen tei var an tapis bep hini ne de dro.

Breman ema deut ar mod egant ar merc'hedou.
Da laqat didan o grong dantelez pe guimpou,
Ur mod brao d'ar merc'hed yaouanq a da re demezet,
Propoc'h ven da velet ha gueloc'h istimet.

Breman e ma deut ar mod gant ar merc'hedou tout,
Da laqat en dantelez pe autramant ur las gouc,
Hac ur manchou pagot unan var bep brec'h,
Ur lerou guen deus en traon gant ur guimp deus an nec'h

Coefou dantelézet hust ho c'holeriou guen,
Quen du hac un tranqat ar c'hrez ba no c'herien,
Dre ma man brao guisquet deus en traon hac an nec'h,
A larfec'h deus o guelet mant hepmanq a nep bec'h.

Moulouset ho broious betec ho savanger,
Gant un daou pe dri ourli setu oes a foter,
Gant ho chausseneier piq marelet ru ha glas,
Traou ezap ar botou na peus quiet goelet biscoas.

Ne ne quiet hep quin ar merc'het a zigas an deguisou
Ar o c'hoasset en deus ive deus an instrumenchou,
Lot a laq an dantel demeus a rochedou,
Ha moulous deus en traon deus foquen o bragou.

Lot al a lak ur vanden gret guis ur chupilis,
Pozet var ur rochet gros guer du hac un tapis,
Henes a zo ur mod mad ben pa vo sellet pis,
Evit pa vo yen dar goan quit da chang bep tri mis.

Nun quin met laquat ur vanden a nain de lassou,
Cetu ur mod didor evit chang rochedou,
Quit da vut flabousset nac uset gant an dour,
Henes so ur mot digoust dar pinvidic a dar paour.

Breman ne zeler quiet quin demeus ar dispignou
Me a gred a zei pindivic merc'hed ar boutiguou,
Breman so deut ur mod neo deus a chupenoudu,
Ar mod cos so disprijet guis ur c'hornat ludu.

Ya breman ar c'hoazet an deveus n'im aquipet,
Us ur gourtizien hep quin guisquet mot galaouet,
Henez zo ur mod accomod lart bep hini guis deus c'hoant
Guechal a voa ret caouet diou breman-ne ve met unan.

Grôet deuz a veser caëra hanvezet dra du fio,
Moulous tris, hini ledan betec andiou hilin,
Guechal an diou chupen du na nanquet godelou,
Breman bars unan hep quin eve groet plas da zool.

Evit laquat an traou butun hac ar pistolenou,
Vige guechal ar gilet plas ar mouchouerou,
Pa zec'h da n'im heurta a nespet guis c'hoare,
Meur da hini a zo bet goal abimet gante.

Mes breman bars ar godel o bec ave dan nec'h.
Quen vo losquet an discarg na rei quiet drouc nep lec'h.
Hen dal e mant traïtour mar carit va c'hredi
Meur a bistolen karguet a zo bet deut da c'hrevi.

Cetu aze, va breudeur ur guir reflexion,
Nep a jonjo mat hini-na nei quiet an abandon,
Cetu placet ar butun hac ar sort trahisen,
Guelomp pelec'h e ma placet ar montr ac ar chaden.

Deus ar giletan dra du hac ur bragou moulus,
Gant ur model boutanou deut demeus a Vro-Zaos,
Hac an tocouou bordou stris ornet gant ur pen pil,
Ho bleo a zo rannet guis re an dud chentil.

Plas ar boutannou dign evize guechal o zon,
Eve placet breman ur chaden pe ur montr,
Henez zo ur mot honorabl ve goelet deus a bel
Gant lod demeus an dud na nequet estranch da vel.

Gant an dud a galite pe an dud a voyen,
Ma deze un amuzant ben pa hant da bourmen,
Da lod ema necesser un horloch pe ur montr.
Evit pellat an danjer a meur da hoal rencontr.

Ar c'hantongner commandant evit regli estal,
Hac an hostis da zivoal deus ar proces verbal,
Evit ma vuio just en heur eve laquet da enni,
Ar c'hloc'h nao heur da zon evit scarzo e di.

Guechal na met an noblanç ur montr hac eur chaden,
Breman ve goelet hant Per a Paul ha Mari Madalen,
Breman ema commun gant cals a dud a vro,
Panevit caout traou d'am bec me me bet unan pel zo.

Mes mar jonjaon caout unan me a rayo ur yun,
Me gred a mo unan gant ur blavez butun,
Breman e ouzoc'h erfat penos e moun badin,
Pa roan divar va c'houst lec'h da real da c'hoarzin.

Neur ziscleria or model demeus an deguisou,
Pere e veler breman tousq ar yaouannquizou.
Hep laret netra met mat deus potret na merc'hed.
Met laret ar virione evel ma zeo gleet.

Guelet e heuz ar plan demeus an deguisou,,
Congiderom c'hoas an traïn bac ar mecanigou,
Breman zo mecanicou vit sevel douar ru,
Fôt met quezec diout traï aran an daounu.

Fôt met traï alchoe pa ve eru er pen,
Accomotoch ve dan hini ve deus ho reen,
Hac un neuden orgal hanvet an telegraph,
A breg an eil querde ben pe beus tra inpentapl.

Ya un dra inpentapl evidomp paysantet,
Unan benec a oar baro in bet invantet,
Bremant eve groit quiri curius da velet,
Hac a cher var an hent bras hep caouet tud na lonet.

A zo un dra impentus gout a ret adra zur,
A c'hoas na nanquet difon pa ran pemp leo noun heur,
Fot met un den abars a oar an trafic,
Ha na ni quin da ober met troi ar mecanic.

Goelet a ram breman deuz an dud a izign,
A oar tena portrejou neur zellet deus hor min,
Caer en deus evel quent an dud a izignou,
Nin quet vit digas tud beo goude ma ven maro.

Hen dal emon assuret evit tenna planyou,
Oalc'h vit tapout lucifer a selenj hed e gergnou,
Na naon mui an avanç poent e din echuet,
A rei d'och da entent pelec'h e ma composet.

Car nafel quet din parlant deus an electionou,
Nemet eguis farçal elarint ur guir pe zaou,
Car guelet aran erfat darn deus ar bayzantet,
Pa c'houlenner o mouejou n'ouzont pe du monet.

Mar carfe an dud chentil pere c'houlenn mouejou,
Donet den em aviza da reide banac'hou,
Eve guelet yan baysant tont da gargo e goff,
Quen a chomfe a blen rampet evel un noc'h.

Ya darn demeuz ar gembil pa gavont da lipat,
Ne deus moderation nemeut ober corvat,
E gant ur chopinat gist hac ur banac'h lagout,
Ema zur an otru da gaout ar mouejou tout,

Emoustoar Roudoualec pozet var ur chastel,
Lec'h neus met tour sant Miquel otorre an avel.
Nep aneus groët ar zon man ne mui guiader,
E hano dre e scritur zo Nicolas Naouer.

A zo breman an noat demeuz a dregont vla
Nao vla so dimezet ha c'hoas a gar cana,
Rac ur vecher vat en doe evit gonit e voed
Panevit ar goal rancontr a oa ganta erruet.

Bars er blavez-mil eis cant tri uguen ha daouzec
Gand an drouc daou lagad e zeo bet abimet,
Mes breman eo commancet tamou da labourat
Non pas vel diagent var ar memes etat.

Rac guel-mat ne ra quet quen ar pez-eo ar goassan,
Mes Doue ra dezan courac'h dre me cresq e boeniou,
Ar zon ma zo greit evit rei doc'h da entent,
Bars ar blavez mil eis cant c'huezec a tri uguen.

Groet ebars e mis gouere just ar chenta devez
Ur vintinvez aroc lein plas tenno carottes,
Bremant c'houlennan ar bonheur da guement e c'hlevo,
Da chom beo ha da tre betec ar maro,

Rac se eta, Bretonnet, tached de himita
Da rei zoulac'h d'ar perrien a zo deus a c'hana,
Poent eo din caout ur banac'h, va zeot a vo zoulpoc'h.
Marteze mo muioc'h a gourac'h ar vouez a vo goeloc'h.

Chanç da guement a glevo pe lenno ar scritur,
Da gaout bars ar bed all ur plas a bligea'dur,
Cetu aze ur chanson losquet eo da vale,
Vit divertissa ann oll partout dre an c'hontre.

FIN.

QUENTEL

Composet a neve, evit goulenn a rei eur Plac'h da eureuji.

Tostait oll, vad yaouanc da selaou eur guentel
Pehini zo composet ebars en ber amzer
Grêt entre un den yaouanc hac an oac'h eus an ty,
O c'houi e verc'h digantan da vont da eureuji.

Ar savanta a c'houlennan eus ma c'hompagnunes
Da rei d'in mar plich gaptan, eur guelennadures,
Ma clévin penos commanç ha penos finissa,
Rac me zo un inoçant, omàn va guech quenta.

Ne lavar den netra din, me rei va volonte ;
Me fizio er sclêrijen e meus digant Doue,
Da c'houlenn e assistanç. Quent avanç davantach,
En eum glêvomp assambles ha greomp sin ar groas.

En hano an Tad eternal, hon mœstr hac hon Roue,
En hano an eil Ferson, guir den ha guir Doue,
En hano er Speret-Santél, a ro ar sclêrijen,
An ners din da drec'hi hon oll adversourien.

Bars en bep occasion hac en danjeriou bras,
E me ar scritur ancien, eo mad sin ar groas.
Da gommanç, da brassa, en daou ben ar ben ;
Nen deus quet agreaploc'h en exerciç christen.

Partiomp var guemense, pa omp-ni assemblet,
Betec he zy da c'houlen ar vaoues a euret.
Ha saludomp an daou goz gant guir humilite,
Rac aon na memb o refus pa c'houlfomp digante.

An Den Yaouanc.

Salud daou vestr an ty-man. Bezit ar vadeles
D'am selaou en toul o tor gant va c'hompagnunes.
O c'houlen permission da antren en o ty.
Rac er mes ne gredan quet goulen ma eureudi.

An Den Coz.

N'och eus ma surprenet, nen doc'h quet deut eb gout
Rac clêvet em boa lavaret e tleac'h arruont.
Antreit, va mignonet, hac azeit eus tol,
Ma tijunfomp assambles ha neum glêvomp oll.

An Den Yaouanc.

Debret a meuse hac evet ar pez a rê va mad,
Eru eo va amzer da c'houlen va mennat :
Dec'h en eum recommandan, va mestres ha va faëron
C'hui a laquan da ober an disposition.

An Den Coz.

Parlant a res en furnes, herve va santimant,
Mes ret e ve dit laret da betra oc'heus c'hoant.
Quent ma alfen o sciour eus ma meus ar pouvoer,
Ranquan beza clêvet un darn eus ho miser.

An Den Yaouanc.

En ho ty zo eur plac'h yaouanc hac a zo arezet,
Blesset eo en he diou vrec'h hac eur scoa dei pleguet :
Ar plac'h-ma a zo blesset dret e bolonte vad,
Ha e êru an doctor a lar dont d'e guellât.

An Den Coz.

P'o clêvan o parlant nen don quet estonet,
Ha pa ran réflexion var ar pez a leret,
Ho daou int en em glêvet d'an eum estropia,
Eur pec'het marvel e ve dont d'o dispartia.

An Den Yaouanc.

Ar question a laret, va faëron a zo guir,
Rac me voa choazet gante evit clêvet ho quir,
Hac ho pedi humblamant da zont da accordi
Ho pennos da rei deze da vont da eureuji.

An Den Coz.

Roet em boa va c'honje dêze da zemezi,
Ha breman roan adaré da vont da eureuji :
Ho c'heuill a rei pen-da ben bete fin ho deves,
Da renta honor deze ha do c'hompagnunes.

An Den Yaouanc.

Finissa ra va chagrin goude ma meus clevet
E tremenin va deves gant pep sort joaüsdet :
Va ze eum ententomp, ha demp, bihan ha bras,
Quent partia da ober hon action a c'hraç.

An Den Coz.

Ya, onnes ar gaëra a ouffemp da ober,
Da c'houlen digant Doue ar chanç hac ar bonheur
Dan daou den a pretantomp da gas da eureuji,
Ma vezint victorius pa deuint da gombatti.

An Den Yaouanc.

O prosterni dan daoulin da ober oreson,
Goulennomp digant Doue deus a greis hon c'halon,
Hac eus ar verc'hes Vari hon guir avocades,
Ma tremenimp hor bue dre douster ha furnes.

An Den Yaouanc.

Finisset eo ar beden ; breman e c'houlennan
Bennos he zad hac he mam eviti da guenta,
Ha neuze ni bartio gant pep sort joaüstet,
D'an ilis d'e eureuji gant enor ha respet.

An Den Coz.

Me a ro de va bennos deus a greis va c'halon,
Jesus da roi assambles e venediction
Ouspen e promettan de, deus ma meus ar pouvoer,
Peadra evit beva eur sommat a amzer.

An Den Yaouanc e fin ar repas.

Finisset eo ar repas, a drugare Doue,
Prosternomp oll d'an daoulin dirac e vajeste.
Da c'houlen chanç ha bonheur dan daou den a euret,
Ha beva en union epad ma vint er bed.

Escusit, compagnunes : quent evit finissa
Leveromp un *De Profundis* d'an eum dispartia,
A galon en delivranç d'an anaon decedet,
Pere a ouffe bea er poaniou arretet.

FIN